

— 330 —

PENNHERÈS TI JAK.

Pébeuz glac'har, tristidigès,
A zo en parrez Tregourez !
Oh ! Jopopo, landadiron,
Landadiron, landadiron, ladiron, ladiron !

Euz a di Jak collet ar c'hi,
Hac ar benherès euz ann ti.

'Zalec al lun bet' ar guener,
N'oa ket bet 'r benherès er gêr.

D'ar zadorn mintin, mintin mad,
Oe rentet 'r benherès d'he zad.

— Dalit, tad-caër, aze ho merc'h !
Me n'ouzon ket hac hi 'zo guerc'h.

Er Gêr-vihan 'ma eus hi c'havet,
E-touez eur vanden gilgoked.

Louizic ar C'hogan, ar c'hoc coz,
A vije gant-hi, 'pad ann noz.

Neuze 'oe casset d'ar gouan,
Da guza euz Louiz ar C'hogan.

Na d'ar gouan, pa oe casset,
He davanjer oa diverret.

Rôt tol fouet d'eï da vont d'ar gêr,
Da stagan 'hed he davanger.

Ar c'houanjou na int ket grêt
Evit ar merc'hed brazezet.

Ha lost ar bic var ann drezenn,
Setu achu ma c'hanaouenn. ;

Ha lost ar bic var ann hent-braz
An hini 'oar a gano c'hoaz.

Mari-Loiz ar Goff. — Novembre 1881

Laemaria-Kemper.

— 331 —

L'HÉRITIÈRE DE CHEZ JACQUES

Quel navrement, quelle tristesse
 Il y a dans la paroisse de Trégourez !
 Oh ! Jopopo, landadiron,
 Landadiron, landadiron, ladiron, ladiron !

Chez Jacques, on a perdu le chien,
 Et l'héritière, de la maison.

A partir du lundi jusqu'au vendredi,
 L'héritière n'avait pas mis le pied au logis.

Le samedi matin, de bon matin,
 Fut rendue l'héritière à son père.

— Tenez, beau-père, voilà votre fille !
 Je ne sais pas si elle est vierge.

A la Petite-ville je l'ai trouvée,
 Parmi une bande de polissons.

Louis le Cogant, le vieux coq,
 Passait avec elle la nuit.

Alors, on l'envoya au couvent,
 Pour la cacher de Louis Le Cogant.

Au couvent, quand on l'eut envoyée,
 (On s'aperçut que) son tablier avait racourci.

On lui donna, pour rentrer chez elle, un coup de fouet,
 Qu'elle pût attacher le long de son tablier.

Les couvents ne sont pas faits
 Pour les filles engrossées.

Et la queue de la pie sur la haie,
 Voilà terminée ma chansonnette !

Et la queue de la pie sur la grand'route,
 Celui qui en sait plus long chantera encore !

Marie Louise LE GOFF, de *Lacmaria-Kemper*.